




# GUERS

VAR SUJET UR FEMELEN MANET INTANVEZ

GANT PÈVAR BUGUEL.



Var ton : *Cantic ur Burete.*

Ni o supli tud devot  
Dont da silaou a gaon  
Ur c'hetic truezus  
A doucho hò calon :  
A zo grët a ~~manet intanvez~~  
Demeus a ~~intanvez~~  
O gimiaai oc'h e mab  
Partiel d'ar brezel.

Qement a gléo ar vers-mà  
Hac a rëi reflexion,  
A zo erior evit un tigr  
Hac evit eul leon  
Ma ne al dont da ouela  
Pa entento e lenn,  
Oll dont da sonjal.  
Ne deo qet guir gristen.

Drindet santel, prosternet dirazoc'h d'an daoulin,  
Me ho ped da rëi sicour d'ho servicher indign ;  
Va speret a zo frajil, ha va s'zzi izej,  
Sclérijen a c'houleunnan ouzoc'h, Drindet Santel.

Guerc'hez Vari, dèc'h en em adressàn ;  
Obtenit din ar memoar evit elloet rimàn.  
Pa goùprenan ar sujet, a ra dîn scuill daelou,  
Me gred a vezò mantret oll gement a c'hlévo.

Crnelloc'h e zomp éru eguet an tirantet  
Pere laqas d'ar maro ho Zalver beniguet ;  
Ne zeus tam humanite etouez ar gristenien ;  
E zit da velet raëtal eus a ze ar breuven.

Me gomz ouz ur femelen euz a Escopti Dol,  
A voa manet intanvez, e hano Anna Bol :  
Pèvar eus a vugale a chom gant ar vreg-se ;  
N'oa get c'hoas achu'r pemp blas ar c'hossa eus ané.

E daou yaouanqa a voa n'o guele languissant ;  
Sonjomp ebars er viser hac ebars an tourmant  
E deveus bet ar vreg-màn gant e bugaligou,  
Hep cavet nep tam sicour digant den eus ar vrô.

Qement tam meubl'e voa a voerzas prontamant,  
Evit allout r  i souten d'e f  var inno  ant;  
E zamouigou dillat prest goud'e a voerzas:  
Tr  ezus voa e g  o eazi en ers en noas.

Bremān var emāz plous en eur c'horn eus an ti,  
E renq monet a los e bugale hac hi.  
E daou buguel languissant a zo ét gant Doue,  
Hac hi chom paralitic qerqent var e güele.

He mab henna a lavar : me ya da zervichi,  
Ha qement a c'hon-jin vo vit ho Dulaji ;  
Lavaret a ra d'e vreur : bez soigu diouz hor mam guèz ;  
Hit da glasq dèi tamou bouet, ha n'ho po qet a vez.

E mab bera neus cavet eur gondition vad ;  
Mes qement a chonée a laqe en dillat :  
D'ar gloar ha d'ar vanite e zè en em livret,  
Ne sonje qet en e vam var e güele chommet.

E mabic anter-hena a voa ganti chommet,  
Hac a yè bende endro da glasq déi tamou bouet ;  
Soigni ré e vam bende, a goalc'hi e dillat  
Ema eo güir melezour ar vugaligou vad.

E mab hena voa en oad da denna d'ar billet ;  
Mes dre m'oa mab intavez e zeo bet exantet ;  
E vreur ar blavez goude, en deveus bet tennet,  
D'accomplissa ar glac'bar an numero isel en deus bet.

Brèmà e retorn d'ar guèr hac e galon mantré.  
P'èru e qichen e vam calz daelou n'eus scuillet :  
Va mamie paour, emeàn, netra refot brêma ?  
Me meus numero isel, hac e renq partia !

E vamic paour en consol gant comzou douç meurbet,  
Va buguel qèz, emezi, n'em gonformi zo ret ;  
Bezit propr ha den honest, grit ervat ho tever,  
Ha me a bedo Doue d'am c'honsoli er guèr.

Lavarat a ra d'he vam da gaout va breur me ya  
Vit e bedi ur veach qent eguet partia ;  
Da rëi déch un dra benac ur vechic an amzer,  
D'ho soulagi, va mam baour, chars en ho mizer.

P'èru e qicheu e vreur, e lavaras deàn :  
Me meus bet eur billet du, hac a ranc partiàn ;  
Ho pedi ràn, va breur qès, da rëi un dra benac  
Da zoulagi hor mam baour a zo ger mizerabl !

E vreur a respont deàn : na et var va zro  
D'interrompi ac'hanòn gant da fi eou ;  
Qentoc'h eguet da gredi, me c'hour bea ractal  
Rentet amà var ar plaç bouzar ha mud ha dall.

Accordet e voe deàn pez en doa goulennet,  
Rentet ha dal ha bouzar, ar gomz en deus collet ;  
Rentet e zeo maleürus bete fin e zeyou :  
Demeus ur seurt accident Doue d'hon preservo.

E vreur evel m'er güelas bars er stad-se rentet,  
A zo retornet d'ar guèr hac e galon mantré ;  
Lavarat a ra d'e vam, en eur scuilla daelou :  
Va breur eo'r maleürussa a guement zo er vro.

Dal ma meus laret deàn rëi un dra benaquet,  
Da zoulaji va mam baour, en celer e zeo êt ;  
Goulennet, en deus bea bouzar ha dall ha mud ;  
Bet en deveus e c'houlen ractal dirac an dud.

E vam a lavar deàn : na veles qen ! me bed  
Doue a visericord da rëi did ar guélet,  
Gouzout a rit, va buguel, Doue zo eun Tad mad ;  
Hac a bardon ar pec'her demeus a galon vad.

Pa voa ar vam desolet d'e buguel o prezeg  
Eur jandarm ebars an ti a zo bet antreet,  
Da r  i de  n e vultin da bartial ractal,  
em   zo bet d   o daou an divea glac'har.

Ar vam baour oll desolet a lavar d'e buguel :  
Deus c'hoas etre va divrec'h ur vech qent vit mervel.  
En em boqat a rejont an eil hac eguiile ;  
Ranna r  je ar galon a gl  vje aneze.

Ar buguel-m  n dezolet a lavar d'e vam gu  z :  
Bet   n e clasq d  c'h sicour ebars en amezeguez ;  
A boan euz va zelaouet ha prizet va c'hl  vet :  
Evelse, va mamie q  z, c'houi vo abandonnet !

E vam a lavar de  n : partiit, va buguel,  
Ha va list en gloar Doue..., r  t e vez o mervel ;  
Serrit an n  r var va c'hein ha cassit an alc'hoe,  
En eur c'hor a eus un em c'hefot goude ze.

Question e v  e brem   d   d'en em separi,  
Pitoyabl e v  e cl  vet ar c'hi a voa en ti.  
Adieu d  c'h, va mamie paour, a lar ar buguel q  z,  
Ranna a ra e galon pa voa e vont erm  z.

Alc'hoeet en deus an n  r var e v  m langeissant,  
Mont a ra gant e alc'hoe d'an ilis prontamant :  
Laqat eure ane  u var gornic an auter :  
Aze me  n, m'en cavo, ma tistro  n d'ar guer.

Stoui' ra var e zaoulin en ilis beniguet ,  
Goulen a ra ur mennat digant Salver ar bed :  
Accordit din, va Doue, ma teuin da velet  
Enterri va mamie paour pa vez o decedet.

Cetu-  n-ta partiet da vonet d'an arme ;  
E vamic paour a varvas pemzec devez goude ;  
Ar c'hleyer eus ar barros a zon dezi glazon,  
Hac e guntinu n  s de hep caout den var o zro.

Accordet e v  e dean pez en doa goulennet.  
Anter cant leo demeus ar guer ar c'hleyer neuz cl  vet ;  
Larat ra de gabiten : Va mamie baour zo maro,  
Me gl  o patant ar c'hleyer o son dezi glazout.

E gabiten a lavar : Eur miracl bras e ve  
Clèvet cleyer ho parros anter cant lèo anè.  
Larat ra de gabiten qemeret un tam fe ;  
Ha c'houi glèvo aneze amàn qercoulz ha me.

E gabiten a lavar : Me o c'hléo coulz ha te ;  
Me royo dit, va buguel, bremà da gonje  
Ma zi d'ar guèr da velet enterri da vam guez  
Rac gout a ràn da galon zo en tristidiguez.

P'en devoa bet e gonje e vale nòs a de,  
Eruout a ra er guèr hep na voe pell dale ;  
Monet a ra d'an ilis, ma stou var e zaoulin  
Da drugarecat Doue eus e c'hraçou divin.

Pa voe écho e beden e qemer an alc'hoe ;  
A dai ma tigorrin jòn e sell ouz e guële,  
Ma cav e vam baoui maro, garni en em dolas,  
Gant ar glac'har en devoa e galon a rannas.

An nòr voa manet digor, tud a zo antreet,  
Ma cavjont anè o daou var ar plous decedet ;  
Monet a rejont ractal da gavet ar Person  
Evit annonci déan an desolation.

Ar Person ro lincelliou evit o liena,  
Hac e ped ive an dud da zont d'o assista.  
Enterret e voent neuze gant peb solennite,  
Laqet o daou assambles ebars er memes be.

Güelet oc'h eus, va brendear, portret ur buguel mad,  
Accordet e voe déan gant Doue e vennad.  
Heuillet en deveus bepret Gourc'hemennou Doue :  
Qemerit èn evit sqüer, me ho ped bugale.

Composet gant Rene ar Bars, a Landreguer.

# GUERZ

*Composé a neve var sujet un evenamant éruet gant  
eur Chure Santel a Escopti Milan.*

Var ton : Santez Anna Palud.

Me ho ped, assistantet a bep seurt qalite,  
Deut da glèvet eur recit composet a neve,  
Divar eur c'hopi gallec ebars en brezonnee,  
Rac util eo disclèria ar pez zo éruet.

En Escopti eus Milan, eo parros Belzoanne,  
A zo eur Chure santel, leun a humilité,  
Truezus ha charitabl en endret ar beorien,  
Hac a zo e oll danve evit dont d'o zouten.

El lec'h ma pos an arc'hant en d'voa goneet,  
Evit lemél eus ané na zimiuant qet,  
Ar pez er gra chagrinet hac en nòs hac en de,  
Pa ne elle gout penos ec'h erru qementse.

Er bloa tri ha daou-uguent, en eiz a vis c'hoevrer,  
E rer an Ofic divin dirag hor Mam santel  
Ar Verc'hez, gloriis Vari ho guir advocates  
Souten an oll bec'herien en peb rouantelez.

Goude ar venediction demeus ar sacramant  
E zeus erruet un den en eur memes instant  
D'e c'houlen da vont gant'an da velet un den clan  
A gave a voa erru en e heur divean

Partiet int assambles gant an Autrou Doue,  
Hac an traou evit noni ar paour affliget-se ;  
Dre voneur e recevas e oll Sacramanchou,  
Hac eun anter-heur goude e souffre ar maro.

Charmet an Autrou Cure o velet ar boneur,  
E chomas d'e assista qen a deu da vervel,  
Da bedi Doue evit'an gant eur galon barfet  
Ha bete fin e vue e deus en assistet.

Pa voe maro an den-mâ e qemer guimiad,  
En eur dont da zoueti dese oll nosvez vad  
Da veilla ar c'horff maro pebini voa gante,  
Hac e commanças e hent en eur bedi Doue.

An domistic eus an ty a voa bet evitân.  
P'er güelas o partial, en em offras dezân  
Da vonet d'e gundai betec e bresbital,  
Hac e trugareqeas gant eur galon leal.

Nan, eme'n Autrou Cure, ne meus aon rac netra,  
Pa è guir em eus douguet Redemptor ar bed-mâ,  
E teuyo d'em preservi deus an drouc sperejou ;  
Rac credi a rân e zeo mestr d'an oll buissançou.

Et eur pennad ac'hane, troet en eur c'harden,  
E clèvas aroc deàn eur voez terrupl o clem,  
Hac o tonet d'e entent ec'h arrêt en e za  
Da sellet en dro dezân, mes na vela netra.

Poursu a ra e basiou evit tosta ountâ,  
Hac e remercas eun den eus an anciena,  
Güen e vièo hac e varo, qen a steredenne  
E zaoulagad varnezân aboué ma tostae.

En eur dont d'e vriata e c'houlenñas outân  
Gant calz a hamilite : petra glasquit amân ?  
Nav heur anter eo brêmâ, et an dud da gousqet,  
Hac an amzer, va mignon, a zo cri ha caled.

Bet òn o c'houlen loja en eun nebeut plaçou,  
Hep ma zòn anaveet gant hini ar mestrou,  
Hac en defot a repu e renqan chom amâ,  
Qen a deui ar sclérijen varnòn da bartia.

Deut ganèn, mar plich ganèc'h, eme'n otro Cure,  
Ra m'ho laco da repos ebars en eur guele,  
Ha deus va c'hommidite a réi déc'h da coania  
Assambles ganèn ouz tol, hac eus ar pep guella.

Pa antreas en e di e ya da c'hoezan an tan.  
Da doma'n den ancien, da c'hortos ozan coan,  
Hac e lavar d'e vatez : Prepar dimp on coanio,  
Ma cozefonip assambles evel camarado.

Pa voant ouz tolazeet e c'houleunas outan  
A betore brô e voa ha piou rêt aneân,  
Hac e respontas déau e voa diouz Betelem,  
Emmanuel e hano, hep ma elles compren.

C'hoas e c'houlenas outan hac èn a voa quernez  
Er vroyou a dremene dre ar rouantelez ;  
Hac e réspondas dezan partout voa'r menez tra,  
Ne velan nemet crimou an abominapla.

An tadou hac ar vamou o velan meprizet  
Dre oll gant ho bugale goude ma vent savet,  
Hac e tennont varneze ar venjanç eus an èe.  
Goal gollou ha droue amzer hac ar mortalite.

Un nombr bras a vlavejou a voa en abondanç,  
Hac amzer vad da zestum ; dre oil ar Brovidanç  
A ro an Autrou-Doue da veva a becherien,  
D'ar re vo fidet deau ne vaneo baviken.

Ractal e tisparissas diouz an Autrou Cure,  
Hac e chommas estonet o velet qementse ;  
Hac evit e recompanç eus e chariteou,  
E lar deàn qen a vo en joayou an ènvou.

Neuze e teu da gompreñ è voa hor Mestr divin  
En deus parlantet outan, hac e ya d'an daoulin  
Da c'boulen pardon outan eus a greis e galon,  
Da c'hortos mont da velet hor Zalver var e dron.

An hini neus recitet ebars en brezonnes  
Tout an explication a zo grêt en gallic,  
A so a baros Plouguiel, Yan ar Gueu e hano,  
Ac e pried ouz en ren e z blas ha trègont zo .

FIN.